

AN ANV

LODENN

3





AL LIESTER (1)

lennadenn

War-dro teir eur emañ tro c'hoarioù ar vugale. Deredet eo ar re-mañ eus pevar c'horn ar barrez ha zoken eus ar parrezioù tro-war-dro. Kerzhout a reont da heul renerien ar c'hoarioù evel chas bihan war-lerc'h o mamm. War an hent emañ ar redadegoù. Plijadur zo leizh kof hag ur gweneg bennak a vez gounezet da vont da brenañ madigoù pe strakerezed e stal Chanig ar Madigoù. Goude e vo klasket gante pignat betek beg ar wern da zistagañ diouzh ar c'helc'h un anduilhenn pe ur pakad gwestell ... Dipitet e vez ar vugale hag ar grennarded war-dro pemp eur pa lâr paotred ar c'homite dezhe eo echu ar c'hoarioù evite.

(diwar F. PERU - Glizarc'hant)

goulennoù

Klaskit en destenn-mañ an holl anvioù a zo el liester. Adskrivit pep hini en unander ha merkit e **ruz** ar pezh a verk al liester. Lakait a-gostez an anvioù a gemm o stumm penn-da-benn pa dremenont eus an unander d'al liester. Studiet e vo ar re-se pelloc'h. Pe dibenn hoc'h eus kavet an aliesañ? Pe dibenn evit an anvioù **tud**? Evit an anvioù **traou**?

Klaskit 5 anv a ra o liester evel :
 madig, madigoù
 parrez, parrezioù
 rener, renerien

klaskomp choazh

Emañ ar **micherour** hag ar **vicherourez** o labourat.
Emañ ar **vicherourien** hag ar **micherouzed** o labourat.
Petra eo merk al liester en anvioù tud-se pa vezont implijet gant ar ger-mell?

Ar **vergodenn** hag ar **vell** zo bet dilezet gant ar vugale.
Ar **mergodennoù** hag ar **melloù** zo bet dilezet gant ar vugale.
Hevelep goulenn evit an anvioù traoù-se.

A) Ar **gazetennerien** a oa deut niverus da welet an darvoud-se.
Ar **gelennerien** o devoa graet harz-labour.
Ar **ganerien** a oa o pleustriñ er sal vras.

B) Ar **c'helc'hioù**-mañ zo treset brav.
Lous eo ar **c'haieroù**.

Penaos e vez merket al liester e anvioù ar strollad **A**?
E re ar strollad **B**?
Peseurt diforc'h a welit hervez ma vez anvioù tud pe traoù?



Un nebeud anvioù tud
ha loened a ra o liester
en **-où** :

mamm, tad,
pried,
leue,
kole...



An anvioù mekanikoù
evel **dornerez** a heuilh ar
reolenn-se.

kentel

1

**Savet e vez liester an anvioù
traoù gant an dibenn **-où** pe **-ioù**
peurliesañ.**



gwele gweleoù
kof kofoù
penn pennoù
kaier kaieroù
levr levrioù
peul peulioù
poan poanioù
bro broioù

2

**An anvioù traoù bev (tud, loened,
gwez) a vez savet o liester gant
an dibenn **-ed** peurliesañ.**



Paotr paotred
Labous laboused
Pesk pesked
Dervenn dervenned

3

Ul liester merket gant an dibenn **-ien** a zo :

- d'an anvioù tud oc'h echuiñ gant **-er** pe **-our**, a verk ur vicher alies ;
- d'un nebeud anvioù loened ;
- d'un nebeud anvioù traoù.

tresour..... tresourien
kelenner..... kelennerien
ebeulebeulien
ibil ibilien
beleg beleien
marc'heg..... marc'heien

4

Diwallit ! Pa vez ar ger-mell dirak an anv e vez merket al liester gant ar c'hemmadurioù ivez.

poelladennoù

1

Lakait an anvioù el liester:

- Ur c'hoariell am eus bet gant ma moereb.
- Serret eo al labouradeg.
- Ar skol-se zo bras. Ar skolaer hag ar skolaerez a zo en o bleud.
- Ret eo kemer ur skubellenn ha lakaat ar gador war an daol.
- Ar soner hag ar ganerez a oa o pleustriñ war ar ganaouenn nevez skrivet gant ma c'hamalad.
- Trouz a gleven er sal a-us d'ar gegin.

2

Lakait an anvioù en unander:

- Laboused a zo o kanañ er c'hoadoù.
- Ar baotred-se ne zeskont morse o c'hentelioù.
- Madigoù ha strakerezed a blijfe din kaout.
- Broioù brav am eus gwelet e-kerzh ma beajoù diwezhañ.
- Aet e oa ar vicherourien da welet ar renerien.
- Ar baotred-se o devoa kofoù tev ha pennoù moal.

3

Stankit an toullouù gant ar gerioù roet lakaet ganeoc’h el liester:

Leun e oa ar gant an (sal, arvester)

Deuet e oa niverus ar da sellet ouzh an

(kazetenner, diskouezadeg)

Kreñv e oa ar glav hag an a nije.

(barrad, tog)

Stanket e oa an gant ar (hent, manifestour)

..... a blij d’ar

(istor, marc’heg, krennard)

Lakait sklaer war ho (liv, tresadenn)



AL LIESTER (2)

lennadenn

- Peseurt loened zo en ho tiegezh ?
- Ur bern ! Kezeg ha saout a zo, met deñved ivez ha c'hoazh ein, kilhegi hag erevent.
- EREVENT ??? O kontañ gevier emaac'h !
- N'emaon ket ! Er c'hrevier emaint. Kerniel hir ha dent lemm o deus. N'o deus ket aon rak ar chas ! Staget e vezont gant kerdin ouzh mein ponner.
- Ha piv 'ra war o zro ? Ho tud ?
- N'eo ket ! Ma breudeur ha me eo. Gant bizhier tev e kasomp anezho d'al lanneier da chaseal al lern hag ar gedon e-touez ar reier.
- HMMM ! ... N'eo ket souezhus. Du-mañ e vez savet brini, tirvi, givri, houldi, klujiri, ligistri ha tousegi. Gwechall e oa tibidi ivez met ar re-se zo nijet kuit tramek an inizi.

goulennoù

- Islinennit an holl liesterioù a gavot en destenn-mañ.
Daoust hag anavezout a rit unander pep hini anezho ?
Urzhiit anezho e teir rann :
- A) Ar re a zo disheñvel a-grenn o liester ouzh o unander ;
B) Ar re a zo merket o liester dre gemm ur vogalennoù e dia-barzh ar ger ;
K) Ar re a zo merket o liester gant ur c'hemm hag un dibenn.

kentel

1 Kavet e vez anvioù o deus ul liester disheñvel penn-da-benn diouzh o unander

buoc'h	saout
ki .. chas	
marc'h	kezeg

2 Anvioù 'zo o deus o liester merket dre gemm ur vogalenn diabarzh.

alarc'h	elerc'h
karreg	kerreg
sant.	sent
kolen	kelin
krogen	kregin
maen	mein
oan	ein
louarn	lern
maout	meot

3 Anvioù 'zo o deus ul liester merket gant kemm ur vogalenn diabarzh + un dibenn **-i** pe **-ier**

tarv.....tirvi	lizher.....lizhiri	kraou.....krevier
kenderv.....kendirvi	karr.....kirri	kazh.....kizhier
bag.....bigi	sac'h.....seier	kloc'h.....kleier
ezel.....izili	krog.....kreier	...

poelladennoù

1

lakait an anvioù el liester:

- Ur marc'h a oa er c'hraou e-tal an ti.
- Ouzh ur garreg e oa aet ar vag da stekiñ.
- Ezel eus ur skipailh sport e oa ma c'henderv.
- Ar maout zo bet lazhet gant ur c'hi drouk, ha n'eo ket gant al louarn.
- Dre chañs e oa an oan en e graou.
- Al lizher am boa lakaet er sac'h-mañ.

2

Poelladenn gontrol:

- Gwelet 'm eus brini ha klujiri er parkeier.
- Staget e vez ar bigi gant kerdin.
- Ar chas a red war-lerc'h ar gedon.
- Kleier an iliz-veur a zo ponner evel mein.
- Kregin en deus kavet dindan ar reier.
- Ar vugale-se zo treuzwisket evel erevent.

3

Leugnit an toulloù gant gerioù lakaet ganeoc'h el liester :

Pelec'h emañ ho bihan? (karr)

Lakait ho ouzh ar (mantell, krog)

Bez' emañ ar o peuriñ war ar (gavr, garzh)

..... a oa kludet war ar (bran, kloued)

..... a ranker prenañ evit mont da weladenniñ ar
(tiked, kastell)

..... an zo lemm. (korn, tarv)